

LE GALL-CARRE/MOAL & FRIENDS

Gant ar bladenn-mañ, **Erwan Moal** (Gitaroù) ha **Tangi Ar Gall-Carré** (Akordeoñs daoudonek) a ginnig deoc'h dizoleiñ o bed-seniñ dezhe; ur bed-seniñ awenet gant sonerezhioù liesseurt ha digor da vat war ar bed-holl.

En tonioù dibar nevez savet gante e veskont en un doare dispar sonerezhioù hengounel Breizh hag Iwerzhon, warne livioù sonerezhioù Afrika hag India degaset gant o mignoned Jérôme Kérihuel, Etienne Callac, Thomas Felder, Konogan An Habask ha Timothée Le Bour, anezhe kanfarted a gaver alies o foetañ hent asambles gante.

Gant « Ar Gall-Carré/Moal & Friends » e tilezer ar boutin hag an ordin da vont `trezek ur bed ennañ dreistijin hag awenoù prim o zonioù.

AN ARZOURIEN

Etienne Callac : gitar-boud
Jérôme Kérihuel : binvioù-skeiñ a bep seurt, kan
Thomas Felder : violoñs
Konogan An Habask : uilleann-pipes
Timothée Le Bour : saksofon

Dont er-maez ofisiel : 5 a viz ebrl

Fest-noz lidañ embann ar bladenn : 30 a viz meurzh e Pederneg

Priz ragurzhiañ : 15€ PTB (mizoù kas profet)



RAGURZHIAD

Adalek bremañ e c'hallit gourc'hemenn ar bladenn ha resev anezhi dre lizher, **15€ PTB an tamm.**

Evit paeañ : **kasit ur chekenn** gant ho chomlec'h da **PAKER PROD** Le Questel - 29900 Konk-Kerne pe **grit un dreuzvankadenn Paypal** da pakerprod@gmail.com.

